

Da biouç e kinnigfint ma c'hanaouenn fentus ?
El laret d'in,mar plij: Ouzoc'h,e vin sentus.

93

D'hac'h,kenvreur hep e bar hama muia karet
Am eus c'hoant da ginnig,kent bean diskaret
Gant falc'h kri an Anko,eur bannac'h soubenn vat.
BLAZ KAOUT C'hoaz zo ganti...Pa pezo he tanvât
E c'houlenfet retorn,ha..mechans..adretorn.

Bezef dinec'h,awalc'h 'vo da gargan ho forn.
Zalc'het 'ta warnezî keit a m'eo tomm ha tomm:
Goude eur c'houchan start a vezef en ho plomm.

Emberr ' vo graet,ouzoç'h,Tonton,
Eur Person bras,unan Kanton,
War ho tiou skoa,eun Domino;
Paeet ganin,a lugerno.
Neuze,avat,'po eur goms domm,
Trec'h da hini Zant Chrysostom.
_Oh,anat eo,pell amzer 'zo,
Eo bras,vel eur vorn,ho keno,
Ha gout' ouzomp 'hoc'h koulz teodet
Hag ar gwellan advocaded.
Met ho teod a zo milliget:
Warbiou ho pabouç na ruill ket ?
Nag eo ho lavar disgenvel
Diouç hini an Doktor santel!
Hen a gomze evit gwellaet,
Ha C'houi,Otro?...evit fallat.
..N'eus forç..kent pell,arc'hoaz,Tonton,
C'houi a vezo Person Kanton:
War ho tiou skoa a lugerno
Eur vantel seiz...gant rubano.
An Domino,'vidoc'h bourc'hiz,
Na vo ket awalc'h diouç ar c'hiz,
Ha c'houi,vit gwir,'rai ho penn fall
Ken napezo eur vantellæ all:
Unan,mar plij,gant Bichig gwenn.
_Dizec'het ho taero a-grem,
Ha bezef drant ha disourci,
Rak bean bezef Chaloni.
..Exceltior:huelloc'h c'hoaz,
War grec'h..hârie,war grec'h..arc'hoaz;
Exceltior;war grec'h,war grec'h
Keit ma pezo sikour ma brec'h.
Me ho c'halvo da Genta Mestr,
Ha sturier 'vezef war hon Lestr.
Vere dignum et ~~gigum~~ est
Rak ho konsorted a zo test,
Ho konsorted diouç an diou reiz,(sexe)
Tud diouç an dibab en hon Breiz,
Eo c'houi a zo ret evit penn:
Hon renet 'ta ha..da viken.
Gant eursturier 'vel Tontonig,
Diriskl dalc'hmat 'vo hon bagig.
Broudet 'ta war ho kalotenn;
"C'hevillet,dispont,ho Kabiten."
..Ni hoc'h heuillo,dreoll,bepred,
Ha bete mervel mar be ret.

+
Met araoç bean kenta Mestr
Ha bean sturier war hon lestr,
Eo ret tremen dre meur a lec'h:
En han' Doue,bezef dinec'h.
..Emberr 'vo graetnozoç'h Tonton,
Eur Person braz,unan Kanton.
Ha na rankfeet ket pell gortoz
_Kredet eo gwirion ma roatoz
Abarç gwelet ar c'har dispari. parl
..Ouzoc'h vo graet..Kleier,war vrall..
Eur Chaloni,eun..Arc'hbeleg,
Eur vikel braz Oll galloudeg,
Ha ma n'eo ket hon Doue dall;
A vezef Escop,..Kardinal,
Excelsior,...ha Pab zoken.
Eun taol troad eta d'an anken:
D'hac'h a vezo 'n oll enorio.
Fians enhon,me..ho skoaio.

+ +
Evit ho kennerza,Tonton.

Si potes capere,capias..

Mar deo ho spered ken tano
Ha m'eo ar bân war ho klopern bleo
Me a ranko koll ma hano
Mar na ran ket d'hac'h koll ho penn.
..Met bezef dispont,ma Zonton,
Toenn nahuito d'hac'h biken
Keit 'ma vo digor CHARENTON
Kollet,pa gerfeet,ho kokenn:
Ouzoc'h,sourci me 'gemero,
Pe me 'vo Maout,me
C'houilaro.

Eur gir c'hoaz.

Na dawin geno 'bet,ken bean kanet c'hoaz:

"Well 've skei war an tomm keit a ma ve tomm poaz."

"Oh,c'houi hag en em blij o ruillal an hencho

Evit kestal,anma,duont,hoc'h oll prejo

Perak na vijec'h ket,C'houi ive,graet Marc'heg,

Marc'heg ar "Gigin vat" hag an "Evacho c'houek ? "

+

+ +

Da biou e kinnigfint ma c'hanaouenn flemmus ?

El lavaret,mar plij:Ouzoc'h..Me 'vo zentus.

(Goulennet ali ar genvreudeur,personed,aluzennerien hakureet,
ha lavaret d'in o barnedigez.)

Copie faite sur le texte manuscrit propriété de MG